

KENVREURIEZ AR BREZONEG



Nº 23

Kenvreuriez ar Brezoneg

Eskopti Kemper ha Leon

K A I E R 23

BENNOZ DOUE.....	I72
22 ed sul ordinal A.....	I73
23 ed sul ordinal A.....	I76
24 ed sul ordinal A.....	I79
25 ed sul ordinal A.....	I82
26 ed sul ordinal A.....	I85
27 ed sul ordinal A.....	I88
Gouel ar Rozera.....	I91

Komanantit da GAIEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG

Job Seite - 29249 GUISSÉNY

C.C.P. I738 - 66 RENNES

BENNOZ DOUE DEOH !

Ne hellom ket dale pelloh evid lavared "Bennoz Doue" ! d'or houmananterien. Gand an niverenn 22, on-doa goulennet sikour.

Meur a hini a zonje marteze e oa echu gand "Kaier-ou Kenvreuriezh ar Brezoneg" goude maro an Aotrou Nedelec. "Daoust hag ar strollad nevez a hello kendelher gand e labour ?" Ha kalz a oa war hed...

Med ar zonzj euz an Ao. Nedelec hag ar c'hoant da veza fidel d'e envor o-deus roet nerz-kalon deom. Al labour on-eus greet abaoe bloaz 'zo a zo ar gwella kred evid on lennerien, ha neuze er skol, e' oam bet gand an Ao. Nedelec ha desket on-hoa gantañ or micher.

Ha setu m'on-eus resevet kalzig ar hant ouspenn priz ar goumanant. Ha c'hoaz ez oa kalz war an heñchou er mêz euz ar gêr o klask eun tamm diskuiz. Laouen em bet a gement-se. Da genta sur awalh, o veza ma welom e hellim kendelher, med dreist-oll o veza ma'z eus diskouezet deom sklêr ez eus kalz a dud hag a fell dezo on harpa.

Laouen ez om ivez o houzoud n'eo ket hebken evid ober diellou eo e vez prenet on embannadurioù, med evid ober implij anezo el lidêrez. War stankaad ez a an overennoù e brezoneg penn-da-benn, pe ar brezoneg, o kemered enno muich-mui a blas, diouz an doare-tud a vez en iliz.

Priz braz a room d'an Overenn kanet e brezoneg penn-da-benn, e kerz pelerinaj eskopti Kemper e Lourd, e 1971 hag 1972.

Ped ha ped a veleien hag a dud fidel a zo bet digoret dezo o daoulagad. "Ya, tro a zo da lakaad pedi e brezoneg !"

Dre zil ha dre gaer, er wirionez hag er sklerijenn, ez a an traou war araog. Bennoz Doue da gemend-hini a zeu d'or zikour.

K. ar B.

22 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Komz Doue a zach warnom gwall gomzou ha goapèrèz.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ

20/7-9

7. Aotrou, c'hoanteet ho peus va deseo
ha lezet am-eus va deseo.
Lakeet ho peus ho torn warnon
ha ganeoh eo eet an treh.
Bemdez e vez c'hoarzet din,
an oll a ra goap ahanon.
8. Be-wech m'am-eus ar gomz da ziskleria,
e rankan krial,
e rankan embann gwaskèrèz ha dismantr;
a-hed an deiz e sach komz Doue warnon,
gwall gomzou ha goapèrèz.
9. Lavared a rean ouzin va-unan:
ne zonjin mui ennan,
ne gomzin mui en e ano.
Med neuze e vez ennon eun tan beo,
eun tan e mel va eskern.
Mond a reen skuiz o klask delher warnañ
ha ne zeuen ket a-benn.

SALM 62

2-3,4-5, 6,8-9

Sehed ahanoh am eus va Doue,

Sehed ahanoh am eus va Doue.

2. Aotrou-Doue, c'hwi 'zo va Doue,
c'hwi a glaskan kerkent ha goulou-deiz.
Sehed ahanoh e-neus va ene, dizeha 'ra va horv hebdoh,
evel ma teu an douar heb dour da graza ha da skarnila.
+++++
3. En ho ti santel, on deut d'ho klevet,
estlammet gand ho kalloud hag ho kloar.
4. Muioh a dalv din ho madelez eged ar vuez,
rag-se ema ho meuleudi war va muzellou.
+++++
5. Ya, bennoz deoh a lavaran 'hed va buez,
en enor d'hoh ano e savin d'an neh va daouarn.
6. Evel gand boued euz an dibab e vo leuniet va ene,
va muzellou o tridal, e kanin ho meuleudi.
+++++

8. Eur skoazell oh bet evidon,
ha dindan skeud ho tiouaskell em eus tridet laouen.
9. En em staga a ran ouzoh a greiz kalon;
war nerz ho torn on harpet.

EIL LENNADENN - En em ginnigit da Zoue ha kinnigit dezañ ho puez e sakrifis.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED

12/I-2

1. Va breudeur, ho pedi stard a ran,
dre drugarez Doue,
d'en em ginnig c'hwi hoh-unan ha da ginnig ho puhez,
en eur sakrifis santel, gouest da blijoud da Zoue.
Aze ema evidon an doare gwirion da adori Doue.
2. Na gemerit ket skouer diwar ar bed a vremañ,
med grit dech beza renevezet,
en eur rei eur stumm nevez d'ho spered,
evid gelloud anaoud petra eo bolontez Doue,
ar pezh a zo mad, gouest da blijoud dezañ,
ar pezh a zo peurvad.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Benniget oh Doue, on Tad, Mestr ar bed,
c'hwi hag ho peus roet da anñud d'ar re vian.
ar Rouantelez.

AVIEL

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

16/21-27

21. Lavaret e-noa Pêr da Jezuz: c'hwi eo ar Meziav, mab an Doue beo.
Azaleg ar mare-se, e stagas Jezuz, ar Hrist,
da ziskuil d'e ziskibien,
e vefe ret dezañ mond da Jeruzalem,
gouzañv kalz a-berz pennou braz ar bobl,
prinsed ar veleien, hag ar skribed,
beza lakeet d'ar maro ha sevel da veo d'an trede deiz.
22. Pêr neuze a denn anezañ gantañ a-gostez
hag a stag d'ober gourdrouz dezañ:
" Doue ra viro, Aotrou, ne c'hoarvezo ket kement-all ganeoh."
23. Med Jezuz a zistroas hag a lavaras da Bêr:
" Adreñv din, Satan, stanka a rez din an hent,
da gomzou n'int ket komzou Doue, med re an dud."
24. Neuze e lavaras Jezuz d'e ziskibien:
" An neb a fell dezañ dond war va lerh,
a dle trei kein dezañ e-unan,
kemer e groaz ha dond d'am heul.
25. Rag an neb a fell dezañ savetei e vuez a gollo anezi,
hag an neb a gollo anezi abalamour din
a zaveteio anezi.
26. Petra 'dalvezo d'an den gounid ar bed oll,
ma teu dezañ koll e vuez;
ha petra a hell an den rei evid kaoud e vuez endro ?
27. Rag Mab an den a zo o tond,
gand an ôlez e gloar e Dad.
Neuze e roio da beb-hini diouz e oberou.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, Krouer ar bed,
diganeoh e teu peb donezon peurvad:
sankit don en or halonou ar garantez evid hoh ano,
magit ar pezh a zo a wella ennom,
en eur startaad on liammou ganeoh,
ha beillit warnom da ziwall kement a vo bet maget ganeoh.
Dre Or Zalver Jezuz Krist,
ho Mab hag on Aotrou,
Doue Beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ar zakrifis santel, Aotrou Doue,
ra lako bepred da ziskenn warnom
ar vennoz a zilvidigez,
evid ma teuo da vad, en or buez,
ar pezh a vez grêt en Overenn,
dindan spesou ar Zakramant.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

COUDE AR GOMUNION

Maget om bet ouz an daol zantel,
gand ar Bara euz an Neñv,
hag ho pedi a reom kaloneg, Aotrou Doue, :
pa 'z eo ar Zakramant-mañ magadur ar garantez,
ra zigaso nerz d'or halonou,
evid ho servicha en or breudeur. (e-ser servij or breudeur)

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

23 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - An dever on-eus da ziarbenn an hini e-neus kemeret an hent fall;
da respont on-do dirak Doue.

LENNADENN EUZ AR PROFED EZEKIEL : 33/7-9

7. Doue a gomzas ouzin evelhenn:
- Mab-den da lakeet am-eus da hedour evid ti Israel.
Pa glevi eur gomz euz va genou,
te a roio anezañ da houzoud euz va ferz.
8. Ma lavaran deun den fallagr:
o vond da vervel emacout,
ha ma ne lavarez ket dezañ lakaad evez,
ha distrei diwar an hent fall,
eñ ,an den fall,a varvo diwar e behed,
med te a houlennin diganez kont euz e wad.
9. Er hontrol, ma'h aliez an den fall da zistrei diwar e hent,
ha ma ne zistro ket,
eñ a varvo diwar e behed,
med te az po saveteet da vuez.

SALM 94

I-2,6-7,8-9

Hirio,na serrit ket dor ho kalon,
se'août mouez an Aotrou Doue!

- I. Deom 'ta ! kanom laouen en enor d'an Aotrou Doue;
a vouez uhel,meulom Doue,roh ar zilvidigez.
2. Tostecom outañ e-kreiz ar veuleudi;
kanom dezañ salmoù ha kantikou.
+++++
6. Deuit tre,stouom beteg an douar,
daoulinom dirag an Aotrou,or Hrouer;
7. Rag on Doue eo,ha ni ar bobl renet gand e zorn.
+++++
8. Hirio eo poent deoh selaou e vouez,
na zerrit ket outañ dor ho kalon,evel gwechall er goueleh,
9. en deiz m'o doa ho tadoù lakat droug da vond ennon,
o klask va amproui,ha goude ma welent kement a reen evito.
+++++

EIL LENNADENN - Ar garantez, setu al lezenn miret penn-da-benn

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED

I3/8-10

8. Jezuz a lavare d'e ziskibien:
 " Na jomit ket war zle gand den,
 nemed e dle ar garantez an eil evid egile,
 rag an hini e-neus karantez evid e nesa,
 e-neus miret al lezenn penn-da-benn.
9. Rag e gwirionez ar gourhemennou:
 na ri ket avoultriez,
 na lazi ket, na laeri ket,
 na c'hoantai ket madoù an nesa,
 hag an oll gourhemennou all,
 a gaver dastumet er gêr-mañ :
 kared a ri da nesa eveldot da-unan.
10. Ar garantez ne ra gaou ouz den.
 Evelse ar garantez eo al lezenn penn-da-benn.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! An neb am har a viro va homzou,
 neuze va Zad e garo, dond a raim ennañ,
 hag on demeurañs a raim ennañ.

AVIEL

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

I8/I5-20

- Jezuz a lavare d'e ziskibien:
15. Ma teu d'az preur mankoud en da gêñver,
 kê da reprenn anezañ, te hag eñ en ho part hoh-unan;
 ma selaou ahanout ez po e hounezet.
16. Med, ma ne zalh kont ebed,
 kemer c'hoaz da vond ganez, unan pe zaou,
 evid ma vo renket an afer,
 war lavar daou pe dri dest.
17. Ma ne fell ket dezañ o selaou,
 lavar d'ar breudeur,
 ha ma ne fell ket dezañ o zelaou zoken,
 ra vo evidout evel eur payan hag eur publikan.
18. E gwirionez, me lavar deoh,
 kement ho po liammet war an douar,
 a vo liammet en Neñvou;
 ha kement ho po diliammet war an douar
 a vo diliammet en Neñvou.
19. Ya, e gwirionez, m'hen lavar deoh,
 ma teu da zaou ahanoh war an douar en em glevet,
 evid goulenn eun dra bennag, e vezo roet dezo,
 gand va Zad a zo en Neñvou.
20. Rag pa vez daou pe dri bodet em ano,
 me a vez eno ganto (en o hreiz)

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, dre ho karantez evid an dud,
om bet prenet ha grêt lugale deoh:
sellit eta, gând madelez ouz ho pugale garet,
evid ma hello ar re a gred en Or Zalver,
beva e gwir frankiz er bed-mañ
ha gounid an heritaj peurbaduz.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, mammenn ar garantez hag ar peoh gwirion,
grit da genta, ni ho ped, ma hellim,
hoh enori, evel m'eo dleet dre ar brovadenn-mañ,
ha grit ivez ma vezim unanet en or menozioù gand ar memez feiz,
en eur gemer perz en Overenn Zantel.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

D'ho kristinien fidel, Aotrou Doue,
e roit dalhmad magadur ha buez,
koulz dre ho komzou ha dre Zakramant an Aoter:
grit dezo en em vataad euz donezonou ken braz ho Mab karet,
evid beza lodeg en e vuez bepred.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

24 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Bez mad da bardoni d'an nesa ar gaou e-no greet ouzit.
Neuze war da houlenn,e vo pardonet dit da behejou.

LENNADENN EUZ LEVR AR FURNEZ GAND AB-SIRAH (Eccli.27/30-28/7)

- 27/30 Drougrañs ha kounnar,daou dra euzuz,e buez ar peher.
28/I An neb e-neus drougrañs a gavo drougrañs a-berz Doue.
Doue a zalh eur gont piz euz e behejou.
2. Pardon d'an nesa ar gaou e-neus greet ouzit;
neuze war da houlenn,e vo pardonet dit da behejou.
 3. Ma vag eun den kounnar ouz unan all bennag,
penaoz e hell-eñ goulenn ar pare digand Doue ?
 4. Ma n'e-neus ket truez ouz eun den hag a zo par dezañ,
penaoz e hell-eñ goulenn pardon evid e behejou e-unan ?
 5. Eñ,paour-kêz dên,ha n'eus nemed korv anezañ,a vag drougrañs,
piou 'ta a bardono dezañ e behejou ?
 6. Bez sonj euz da finvezioù diweza,
leze a gostez peb kasoni,
sonj e fin da vuez hag en da varo,
ha mir da vad ar gourhemennou .
 7. Bez sonj er gourhemennou,
ha na jom ket da vaga kasoni ouz da nesa.
Bez sonj en emgleo an Doue uhel-meurbed,
ha d'ezonj mankou da nesa.

SALM IO2

I-2,3-4,9-10,11-12

Kanom bennoz da Zoue,va ene!
Kanom bennoz da Zoue !

1. Lavar bennoz da Zoue,va ene,
kement a zo em hreiz,bennoz d'e ano santel !
2. Ya,va ene,lavar bennoz d'an Aotrou,
na zizonj morse e oll vadoberou.
+++++
3. Eñ an hini a bardon dit da oll behejou,
a bare ahanout euz peb kleñved;
4. Eñ an hini a ziwall da vuez diouz ar maro,
a ra dit eur gurunenn gand e vadelez hag e drugarez.
+++++

9. E damallou, n'int ket greet evid atao,
hag e gounnar n'eo ket da badoud.
10. N'eo ket hervez or pehejou e ra en or heñver,
n'eo ket diouz an droug a reom e kastiz ahanom.

+++++

11. Ken uhel ha ma'z eo an neñv 'uz d'an douar,
ken braz eo e vadelez evid ar re a zouj anezañ.
12. Keit ha m'emañ ar zav-heol euz ar huz-heol,
e kas pell diouzom or pehejou.

+++++

EIL LENNADENN - Bevom ha marvom evid an Aotrou.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL D'AR ROMANED 14/7-9

7. Va breudeur, ne vev, nikun ahanom, evitañ e-unan,
ha nikun ne varv evitañ e-unan.
8. Rag ma vevom, e vevom evid an Aotrou,
ma varvom, e varvom evid an Aotrou.
En or buez hag en or maro, ez om d'an Aotrou.
9. Rag, ar Hrist a zo marvet ha savet da veo,
evid dond da veza mestr ar re varo hag ar re veo.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Bremañ, e roan deoh an ano a vignon, eme Or Zalver,
kement am-eus klevet gand va Zad;
am-eus roet deoh da anaoud. (Yn 15/15)

AVIEL

AVIEL OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. 18/21- 35

21. Pêr a dosteas ouz Jezuz hag a lavaras dezañ:
- Aotrou, ped kwech, ma teu d'am breur mankoud ouzin,
e tlean-me pardonñ dezañ ? Beteg seiz gwech ?
22. Jezuz a respontas:
- Ne lavaran ket dit beteg seiz gwech,
med beteg seiteg gwech ha tri-ugent seiz gwech.
23. Heñvel eo Rouantelez an Neñvou ouz eur roue,
hag a fellas dezañ renka e goñchou gand e zervicherien.
24. Pa voe staget da renka e goñchou,
e oe digaset dirazañ
eun den hag a oa dleour dezañ a zeg mil talant.
25. O veza n'e-noa ket peadra da baea e zle,
e raos ar mestr urz d'e werza, eñ, e wreg e vugale,
ha kement e-nevoa,
da veza evelse diskarg euz e zle.
26. Neuze e kouezas ar zervicher e-harz e dreid,
ha stouet dirazañ, e lavare:
- Aotrou, roit amzer din,
hag e paein deoh kement ez on dleour."
27. Kroget an druez emañ, ar mestr a lezas e zervicher da vond kuit,
hag a roas dezañ an distaol euz e zle.

28. Med en eur vond er mêz,
hemañ a gavas unan euz e genzervicherien,
hag a oa dleour dezañ euz a gant diner;
paka 'reas krog ennañ ha waska war e houzoug,
beteg war-nez e vouga, en eur lavared: "Pae da zle!"
29. Neuze e kouezas ar zervicher e-harz e dreid,
en eur bedi anezañ:
- Ro amzer din hag e paein va dle.
30. Egile ne fellas ket dezañ,
mond a reas da lakaad e daoler er prison,
beteg m'e-nefe paeet e zle.
31. O welad kement-se, ar zervijerien all a oa glaharet braz
hag a zeuas da gonta d'o mestr kement a oa c'hoarvezet.
32. Neuze e lakeas ar mestr e helver hag e lavaras dezañ:
- Servicher fallagr, an distaol euz kement e oas dleour din,
am eus roet dit, o veza m'az-poa pedet ahanon;
33. daoust ha n'oa ket dleet dit d'az tro,
kaout truez ouz da genservijer,
evel m'am-eus bet truez ouzit ?
34. Hag ar mestr, kounnar braz ennañ,
e lakeas etre daouarn ar vourevien,
beteg m'e-nevoe paeet penn-da-benn e zle.
35. Evel-se e ray en ko keñver va Zad euz an Neñv,
ma ne bardonit ket a-greiz kalon,
peb-hini ahanon d'e vreur.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Taolit ho sellou warnom, Aotrou Doue, Krouer ha Renner peb tra:
hag evid m'anavezim ar vad a ra ho trugarez evidom,
grit deom en em rei a greiz or halon d'ho servicha.

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Selaout or pedennou gand madelez, Aotrou Doue,
ha grit digemer vad da brovou ho servicherien,
evid ma vo ar pezh a ginnig peb unan d'hoh enori,
talvouduz evid silvidigez an oll.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, ma tevio vertuz ar Zakramant
da garga ahanom, korv hag ene,
evid ma vim renet gand gras ar Zakramant-se,
kentoh eged gand or menozioù on-unan.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

25 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Klask Doue, chench buez, setu ar pezh a vez goulennet diganeom.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAZ

55/6-9

6. Bezit war glask euz an Aotrou endra ma vo tu d'e gavoud,
en em eibedit outañ, e-keit ha m'ema tost deoh.
7. Ra droio an den fall diwar e hent,
hag an den fallagr diwar e vennoziou;
ra zistroio da gavoud an Aotrou, e-no truez outañ,
da gavoud on Doue, rag mad eo da bardoni.
8. Rag ho sonjou n'int ket va zonzou,
ha va hentchou din n'int ket hoh hentchou, eme an Aotrou.
9. Kement ha m'ema uhelloc'h an neñv a-uz d'an douar,
evel-se ema va hentchou a-uz d'ho re,
ha va menoziou a-uz d'ho menoziou.

SALM I44

2-3, 8-9, I7-I8

2. Bemdez e kanin meuleudi deoh,
meuleudi d'ho hoh ano da viken.
3. Braz eo an Aotrou ha meulet neurbed;
n'eus harz ebéd d'e vrazter.

+++++

8. Truezuz ha trugarezuz eo an Aotrou,
difonn da vond e kounnar ha leun a vadelez.
9. Mad eo an Aotrou e-keñver an oll,
ha trugarezuz evid e oll grouadurien.

+++++

- I7. Leun a justis eo an Aotrou e kement a ra,
leun a vadelez en e oll oberou.
- I8. Dond a ra da gichen kement hini a bed anezañ,
kement hini a bed anezañ a wir galon.

+++++

EIL LENNADENN - Evidon-me, eme Zant Paol, beva eo ar Hrist.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA CRISTENIEN FILIP

I/20c-24,27

- 20c Va breudeur, pe veo, pe varo e vefen,
brazder an Aotrou Doue a vo roet da araoud em horv.
21. Rag evidon-me, beva eo ar Hrist
ha mervel a zo eur gounid.
22. Med neuze, ma teu din, en eur jom
da veva em horv er bed-mañ
ober eul labour talvouduz,
n'ouzon mui petra da zibab.
23. Rag on etre an daou;
karoud a rafenn mond kuit euz ar bed-mañ,
evid beza gand ar Hrist, rag ar gwella eo an dra-ze;
24. A-hend all, ablamour deoh-hwi eo talvoudusoh
e chomfen war an douar.
27. Ha c'hwi, renit eur vuez din euz Aviel an Aotrou Krist.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

Komzit, ni ho ped, Aotrou,
ouz ho selaou emma ho servijer;
ganeoh emma Komzou ar Vuez Peurbaduz. ALLELUIA !

AVIEL

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

20/I-I6a

Jezuz a lavaras ar barabolenn-mañ:

1. Heñvel eo Rouantelez an Neñvou ouz eur penn-tiegez,
hag a zo eet er mêz kerkent ha tarz an deiz,
da hopra labourerien evid e winieg.
2. Marhad a reas ganto evid eun diner an dervez
hag e kasas anezo d'e winieg.
3. Eet er mêz war-dro nav eur diouz ar mintin,
e welas re all aze war ar blasenn, dilabour.
Ha dezo e lavaras:
- Kit, c'hwi ivez d'am gwinieg,
hag e roin deoh ar pezh a zo just.
Hag ez-ejont.
5. Deuet adarre er mêz war-dro kreizteiz,
ha war-dro teir eur goude kreizteiz,
e reas ar memez tra.
6. War-dro pemp eur, e teuas hoaz er mêz
hag e kavas re all eno ha dezo e lavaras:
- Perag ez oh chomet aze, epad an deiz, dilabour ?
7. Hag int-i da respond dezañ:
- N'eus bet den ebed ouz or gopra !
Hag e lavaras dezo
- Kit, c'hwi ivez, d'am gwinieg!
8. Pa voe deuet an abardaez, e lavaras mestr ar winieg d'e verour:
- Galv al labourerien ha ro dezo o fae,
en eur vond euz ar re ziveza d'ar re genta.

9. Pa zeuas ar re a oa kaset da labourad war-dro pemp eur,
e resevjont peb a ziner.
10. Pa zeuas tro ar re genta, e sonje d'ar re-mañ kaoud muih,
med reseo a rejont int-i ivez peb a ziner.
11. En eur reseo o fae, e hrczmolent a-eneb mestr an tiegez, en eur lavared:
- Ar re-mañ, degouezet da ziweza,
n'o deus grêt nemed eun eurvez-labour,
ha padal int lakeet ganeoh kein ha kein ganeom-ni,
hag on-neus gouzanvet pouez an deiz hag herrder an heol.
13. Ar mestr a respontas da unan anezo:
- Va mignon, ne ran ket a haou ouzit,
daoust ha n'eo ket evid eun diner
eo ho poa greet marhad ganin ?
14. Kemer ar pezh a zo dit ha kerz d'ar gêr.
Fellout a ra din rei d'an diweza kement ha dit.
15. Daoust ha ne hellan ket ober ar pezh a fell din gand va feadra ?
Perag ez es gwarizi en da galon,
ablamour ma z'on mad ?
- 16a. Evelse ar re ziweza a vo ar re genta,
hag ar re genta a vo ar re ziweza.

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, an oll gourhemennou euz ho lezenn
ho peus dastumet en unan: ho kared-c'hwi ha kared an nesa:
grit deom heulia mad ho kourhemennou
ha gounid evelse ar vuez peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer gand madelez,
provou ho pugale gristen:
ar pezh a reont hag a anzavont en Overenn gand devosion ha feiz,
grit ma resevint ar frouez anezañ,
dre ar Zakramant eus an Neñv .

Dre Jezuz Krist, Or Zalver . AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Aotrou Doue, pa zigasit nerz nevez deom dre ar gomunion,
kendalhit d'or skoazella bepred gand madelez,
deom da reseo fouez ar zilvidigez,
en or buez penn-da-benn koulz hag en Overenn.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

26 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Ma teu d'ar peher distrei diwar an hent fall, savetei a ray e vuez.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED EZEKIEL

18/25-28

25. Setu amañ komzou Doue:
 - C'hwi a lavar: N'eo ket just an doare a gemer an Aotrou da ren.
 Daoust hag eo va doare din-me na vefe ket just,
 ha n'eo ket kentoh hoh-hini ?
26. Pa zeu an den just da zistrei diwar an hent mad,
 ha da ober an droug, ha mervel diwar an dra-ze,
 en abeg d'e fallagriez eo e varv.
27. Ha pa zeu ar peher da drei kein d'e behed,
 evid mired ar pezh a zo mad ha just,
 e savete e vuez.
28. En abeg m'e-neus dibabet
 trei kein d'an oll behejou e-noa greet,
 ne varvo ket; beva a ray;
 Setu komzou Doue oll-halloudeg.

SALM 24

4bc-5,6-7,8-9

An heñchou a heuiljit, Aotrou Doue,
 n'int nemed madelez ha fealded d'ho ker.

- 4bc Grit din anaoud an heñchou a heuliit, Aotrou Doue,
 deskit din ho kwenjoennou.
5. Grit din kerzed en ho kwirionez ha kelennit ahanon,
 rah c'hwi eo an Doue a ro din ar zilvidigez.
 ++++++
6. Na zizonjit ket, Aotrou, ho madelez hag ho trugarez,
 a zo bet anezho a viskoaz.
7. En ho madelez, dalhit sonj ahanon,
 c'hwi ken trugarezuz, Aotrou Doue.
 ++++++
8. Mad ha just eo an Aotrou: d'ar beherien e tiskouez an hent mad.
9. Heñcha 'ra an dud izel da veva reiz;
 deski 'ra e hent d'an dud izel.

EIL LENNADENN - Lakit en ho kalonou ar santimañchou a oa e Jezuz Krist.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER FILIP

2/I-II

- I. Mar deo gwir e kaver en Aotrou Krist,
konfort kenetrezor, frealzidigez er garantez,
unaniez er Spered, karantez ha trugarez,
2. neuze evid ma vo barr va levenez,
bezit ennoh an hevelebr spered, an hevelebr karantez,
an hevelebr ene, an hevelebr santimant.
3. Na glaskit ket sevel uhelloc'h eged ar re all, na fougeal,
med bezit izel awalh a galon,
evid prizoud ar re all uhelloc'h egedoh.
4. Peb-hini o telher kont, n'eo ket euz e vad e-unan,
med kentoc'h euz mad ar re all.
5. Bezit etrezoc'h ar memez santimañchou,
a oa er Hrist Jezuz.
6. Ar Zalver Je uz, o veza en e stad a Zoue,
n'eo ket fellet dezañ derhel groñs d' a'renk a lak anezañ
par da Zoue (pe: ne oa ket evitañ eul laeradenn beza par da Zoue);
7. er hontrol (pe: med) diskennet eo ken izel ha netra,
kemeret gantañ ar stad a sklavour (pe: a zervicher),
deut da veza heñvel ouz an dud,
hag anavezet diouz e zoare evel eun den e-touez ar re all,
8. En em izelleet e-neus, ha sentus eo bet beteg ar maro,
ar maro war ar groaz zoken.
9. Ablamour da-ze, e-neus Doue savet anezañ d'an uhella,
ha roet dezañ an ano a zo dreist da bebr ano.
10. Rag-se, dirag ano Jezuz e tle an oll plega o daoulin,
en Neñv, war an douar ha dindan an douar,
- II. ha peb teod a dle diskleria ez eo Jezuz Krist an Aotrou,
evid gloar an Tad.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuez;
an neb e-neus c'hoant kavoud an Tad a dle tremen drezon.

AVIEL

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE

2I/28-32

- Jezuz a lavare da Brinsed ar veleier
ha da bennou braz ar vro:
28. - Petra 'zonjit euz kement-mañ ?
Eun den e-noa daou vab,
mond a reas da gaoud ar henta hag e lavaras dezañ:
- Va mab, kae da labourad hirio d'am gwiniieg.
 29. Respont a reas: "Ne fell ket din!"
Med goude, savet keuz gantañ, ez eas.
 30. Goude ez eas an tad da gaoud egile,
hag e lavaras ar memez tra dezañ.
Hemañ a respontas: "Mond a ran, Aotrou!"
Ha ne 'z eas ket.
 31. Pehini anezo e-neus greet bolontez e dad ?
Respont a rejont: "Ar henta"

.....

Jezuz a lavaras dezo:

- Ar Bublikaned hag ar merhed a vuez fall
a ya en ho raog e rouantelez Doue.

32. Rag Yann a zo deuet d'ho kaoud,
o veva hervez ar justis,
ha n'ho-peus ket kredet ennañ.
Ha c'hwi goude beza gwelet ar pez ho-peus gwelet,
n'hoh ket deuet da gaoud keuz, evid kredi ennon.

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, o kaoud truez hag o pardoni,
e tiskouezit ar gwella ez oh oll-halloudeg;
skuillit 'ta mui-hui ho trugarez warnom,
ha grit deom kerzed gand mall war hent ho promesaou,
da hounid on lod e madou ar baradoz.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken . AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Doue trugarezuz,
ober digemer vad d'ar brovadenn-mañ a ginnigom deoh,
ma tarzo diwarni, evidom, mammenn an oll hrasou.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, ra vim renevezet krov hag ene, gand ar Sakrifis Santel;
goude m'on-eus kemeret perz e Pasion Or Zalver,
en eur lida an Overenn gand ar zonz euz e varo,
grit ma vim lodeg gantañ ivez e gloar ar baradoz.

Eñ on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken . AMEN !

27 ed SUL ORDINAL A

LENNADENN GENTA - Ti Israel eo gwinieg an Aotrou, Mestr ar bed.

LENNADENN EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS

5/I-7

1. Da gana ez an d'am mignon,
kanenn ar muia-karet diwar benn e winieg.
Va muia-karet e-noa eur winieg,
ouz eun dorgenn druz he douar.
2. Trei a reas an douar enni hag e ziveina,
planta kefiou-gwini euz ar henta,
sevel eun tour er hreiz ha kleua eur waskêrêz.
En gortoz edo ma taolfe rezin mad,
ha, padal, ne daolas nemed rezin pud.
3. Ha bremañ, tud Jeruzalem ha tud Juda,
deuit da varn, me ho ped, etrezon-me ha va gwinieg.
4. Petra 'hellen da ober d'am gwinieg,
ouspenn ar pezh am-eus greet ?
En gortoz edon ma taolfe rezin mad,
perag eta he-deus taolet rezin pud ?
5. Mad, da lavared ez-an deoh, petra 'rin d'am gwinieg:
tenna an harz a zo endro dezi, hag e vo peuret gand al loened,
diskar ar voger, hag e vo breset gand an treid.
6. Ober a rin anezi anezi eul lanneg,
ra ne vo mui na divleñchet, na c'hwennet,
spenn ha drez a zavo enni,
ha divenn a rin d'ar goabrenn,
lakaad ar glao da goueza warni.
7. Rag Israel eo gwinieg an Aotrou, Mestr ar Bed,
ha tud Juda eo ar blantenn a blije ar muia dezañ.
En gortoz edo euz lealded ha setu fallagriez,
en gortoz edo euz justis ha setu klemmou an dienez.

SALM 79

9, I2, I3-I4, I5-I6, I9-20

Diskennit en ho kwinieg, Aotrou,
diskennit daved ho pobl.

9. Eur winieg az-poa displantet euz Bro-Ejipt,
hag asplantet anezi, o kas kuit ar bayaned.
10. Astenn a ree e skourrou beteg ar mor,
hag e hreskennou beteg ar Stêr vraz.
+++++
13. Perag beza diharzet endro anezi ?
An dremñidi a gutuill rezin diwarni,
moh-gouez ar hoajou a-zeu da duria enni,
14. ha loened ar mêziou da beuri.

15. Doue, mestr ar bed, sellit euz lein an neñv,
ha deuit da weled ar winieg-mañ,
bet plantet gand ho torn.
16. Diwallit anezi, hag ar greskenn ho-peus dibabet diwarni.

19. Biken mui ne dehim pell diouzoh,
digasit buez ennom, ha ni a bedo hoh ano.
20. Aotrou Doue, Mestr ar bed, grit deom distrei,
taolit warnom eur zell a garantez,
hag e vezim saveteet.

EIL LENNADENN - Ganeoh e vo Doue ar peoh.

LENNADENN EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER FILIP

4/6-9

6. Va breudeur, n'it ket d'en em jala gand netra,
med, n'eus forz petra 'zigouezo,
pedit hag aspedit gand anaoudegez vad,
da lakaad da zevel ho koulennou warzu Doue.
7. Neuze peoh Doue hag a zo en tu all da gement a heller meiza (sonjal)
a viro ho kalon hag ho spered en Aotrou Jezuz Krist Jezuz.
8. A-hend all, va breudeur,
kement a zo gwir, kement a zo onest,
kement a zo just, kement a zo glan,
kement a zo din da veza karet hag enoret,
kement a zo santel ha din da veza meulet;
gand an oll draou-ze, eo deoh trei ho spered.
9. Ar pezh ho-peus desket ha resevet,
ar pezh ho-peus klevet euz va ferz,
ha gwelet ahanon oh ober,
grit kement-se hag an Doue a beoh a vo ganeoh.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Ho komzou, Aotrou, a zo evidom spered ha buez;
ganeoh ema Komzou ar vuez peurbaduz.

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE.

22/33-43

- Jezuz a lavare da brinsed ar veleien ha da bennou braz ar vro:
33. Selaouit ar barabolenn-mañ:
eur penn-tiegez a blantas eur winieg,
a gaeas tro-war-dro,
a gleuzas enni eur waskêréz (presouer)
hag a savas eun tour.
Goudeze e roas anezi diouz feurm
da winierien hag ez eas da veaji.
34. Pa zeuas ar mare da gutuill ar rezin,
e kasas e zervicherien daved ar winierien,
evid kaoud diganto frouez ar winieg.
35. Med ar re-mañ a grogas en e zervicherien,
a skoas gand unan, a lazas unan all,
hag a stlapas nein ouz an trede.
36. Kas a reas adarre ar mestr servicherien all niverusoh

eged ar ar re genta,

reaset e oent en heveleb doare.

37. A-benn ar fin e kasas dezo e vab, en eur lavared:

- Va mab, o-do doujañs evitañ.

38. Mad o weled ar mab, e lavaras ar winierien kenetrezo:

- An heritour eo hemañ, deom dezi ! Lazom anezañ
hag e vo deom an heritaj.

39. O veza paket krog ennañ, int d'e daoler er mēz euz ar winieg
ha d'e laza.

40. Ahanta, pa zeuio mestr ar winieg,
petra 'raio d'ar winierien-se ?

41. Respont a rejont:

- Eur maro kriz a roio d'an dud fallagr-se,
e winieg a roio diouz feurm da winierien all,
hag a roio dezañ ar frouez anezi d'ar poent.

42. Ya ! eme Jezuz, ha n' 'ho-peus ket lennet biskoaz er Skrituriou:
ar mēn taolet kuit gand ar re a zave an ti,
ar mēn-se a zo deuet da veza ar mēn korn.

Kement-se eo labour an Aotrou Doue,
hag eun dra burzuduz eo evidom.

43. Setu perag e lavaran deoh:

- Rouantelez Doue a vo tennet diganeoh,
evid beza fiziet en eur bobl
hag a ray dezi taoler frouez.

PEDENN AN DIGOR

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, ken brokuz en ho madelez,
ma roit d'an dud ho ped en tu all d'o meritou ha d'o goulennou,
skuillit warnom ho trugarez,
koulz evid pardoni kement a zo o poueza war or houstians
hag evid rei deom beteg ar madou na gredom ket goulenn.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer ar zakrifis,
savet gand ho Mab diwar ho kourhemenn;
ha-dre an Overenn Zantel, a fell deom lida,
hervez ar garg roet deom euz ho perz,
lakit da ziskenn ennom ar grasou a zantelez,
gounezet gand Or Zalver ouz or prena.

En, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Ho pedi a reom, Doue oll-halloudeg:
gand ar Zakramant on eus bet, grit ma vo torret deom
sehed ha naon an ene,
ha ma teuim da veza unan gand an Hini a resevom evid or magadur,
Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUEL AR ROZERA (7 a viz here)

LENNADENN GENTA - Er Skritur Zakr, ar homzou a glevom a zo lavaret gand Furnez peurbadel Doue; med ken gwir int e-keñver ar Werc'hez Vari, a zo bet a-viskoaz e spered Doue.

LENNADENN EUZ LEVR AR FURNEZ

Prov.8/22-31

22. An Aotrou Doue e-neus roet buez din, er penn kenta euz e oberou,
a-barz m'e-noa grêt netra, a oll viskoaz.
23. Araog peb amzer, on bet furmet, e penn kenta peb tra,
pa ne oa ket a zouar.
24. Ar moriou don ne oa ket c'hoaz anezo, ha me 'oa ganet;
ne oa ket c'hoaz dour -zaviou (pe:mammennou) o tarza.
25. A-barz m'eo bet diazezet ar menezioù braz,
araog an torgennou ez on bet ganet;
26. n'e-noa grêt c'hoaz nag an douar hag ar mêzioù, na danvez kenta ar bed.
27. Pa gempenne an hoñvou, me 'oa eno,
pa stigne kelh an aobl a-zioh gorre ar mor don,
28. pa stage ar hoabr (pe:ar houmoul) uhel en neh,
pa zalhe war mammennou an douar,
29. pa verke d'ar mor e harzou, gand divenn d'an dour da vond dreist,
p'edo o startaad diazezoù an douar.
30. En e gichen edon o rén al lahour, hag e zudi a reen bemdez,
d'hañvad o hoari dirazañ,
31. o hoari war voul an douar,
ha va dudi a gaven e-touez bugale an dud.

SALM I2

6ab, 6cd gand an diskan euz Izaiaz 61/10

Birvi 'ran gand al levenez, (ton:I.V.ar Porzou)
en Aotrou, Mestr Braz ar bed;
ha tridal a ra va halon
en Doue zo va Zalver.

I2/6ab Va Doue, fiziañs am eus en ho madelez;
tridal a ray va halon ablamour d'ho silvidigez.

I2/cd Me 'zavo eur hantik d'an Aotrou evid e vadoberou;
me 'zono war an deleñn en enor d'an Aotrou.

pe: evid mond war an heveleb ton:

6ab Va Doue, fiziañs 'm eus ennoh, - ker braz eo ho madelez;
ha tridal a ra va halon - 'blamour d'ho silvidigez.

6cd Me 'zavo eur hantik nevez - d'an Aotrou ker mad ouzin;
me a zona war an deleñn - 'vid enori an Aotrou.

pe: war don Chapeled a joa,pe eun all mentet 4 X 8

- | | |
|--|---|
| <p>I. Benniget oh,Gwerhez Santel,
ha din da veza enoret,(mari)
Rag en eur jom bepred gwerhez,
c'hwi zo bet grêt Mamm ar Zalver.
(Mari)</p> | <p>2. Gwerhez Vari,Mamm da Zoue,
an Hini 'zo Mestr da beb tra (Jezuz)
brasoh eged ar bed a-bez,
en ho korv sakr 'zo bet klozet.(Mari)</p> |
|--|---|

LENNADENN 2 - Pa lavar Sant Paol ez eo ar Zent anavezet gand Doue a viskoaz,
euz piou ez eo ken gwir hag euz ar Werhez Vari ?

LENNADENN EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM 8/28-30

28. Va breudeur,evid an dud a gar Doue,
ni oar e tro peb tra evid o mad,
o veza m'int bet galvet d'ar feiz hervez e venoz a garante.
29. O anaveet e-neus a oll-viskoaz,
hag o dibabet da zond da voud heñvel ouz e Vab,
evid ma vo hemañ a't henta-ganet euz kalz a vreudeur.
30. Ar re e-neus dibabet,e-neus ive galvet;
ar re e-neus galvet,e-neus o lakeet e stad a hras,
hag ar re e-neus laket e stad a hras,e-neus roet dezo e hloar.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Meuleudi deoh,Aotrou Krist,Meuleudi deoh,Mab ar Werhez Vari !

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ I/26-38

26. En amzer-se,e oa bet kaset an El Gabriel gand Doue,
d'eur gêr a Vro-Halilê anvet Nazared,
27. da gaoud eur plah yaouank dimezet d'eun den anvet Jozef,
euz lignez David,hag ano ar plah yaouank a zo MARI.
28. Erruet beteg enni,an El a lavar:
" Me ho salud,leun a hras,an Aotrou Doue 'zo ganeoh."
29. Hi a zav strafuill enni,o klevet seurd komzou;
sonjal a ra ganti heh-unan petra 'hell beza ar zalud-se.
30. An El a lavar dezi:" Na gemerit ket aon,Mari,rag plijet oh da Zoue.
31. Setu emaoch o vond da gonsevi,hag e viot mamm d'eur mab,
a roiote dezañ an ano a Jezuz.
32. Hennez a vo braz,hag anvet e vo Mab da Zoue,Mestr an Neñv;
33. roue e vo war lignez Jakob da viken,
hag e rouantelez ne vo fin ebed dezi.
34. Lavared a ra Mari d'an El:
- Penac'h e hoarvezo kement-se ?
Gwerhez on hag e choman.
35. Respont a ra an El dezi:
- Ar Spered Santel a ziskenno warnoh,
ha galloud Mestr an Neñv a holoio ahanch.
Dre-ze,ar hrouadur a vo santel,ha mab da Zoue e vo anvet.
36. Ha setu Elizabet,a zo kar deoh,he deus konsevet ive,daoust d'he oad
hag ar hwehved miz eo eviti,
goude ma lavarar ne vo morse mamm.
37. Rag Doue n'eus netra dreist e halloud.
38. Mari a lavar neuze:
- Setu amañ servicherez an Aotrou:ra vo grêt din evel m'ho peus
lavaret." Hag an el a ya kuit diouti.